

# Kimiadou eur Martolod a Vreiz



War ton : An Drouk-Hirnez (le mal du pays)  
Setu ar flick ha flock

Bretoned, me ho ped, didostet da glevet  
Eur himiad truezus, eun adieu trist meurbet  
A ra de gervroiz quen monet d'ar brezel  
Eur martolod yaouank magel en Breiz-Izel.

An eiz-varnugent a viz maë, me oa en faksion  
War bont ma batimant bars er rad en Toulon,  
O c'hortoz partia vit mont d'an Itali.  
War ben tri de goude, e klemp ambarqui.

Me gred a oa tremenet an eur a hanter-noz  
Ha ma c'hamaraded oa et da repos ;  
Netra na drouble neuze ar silans deuz a noz  
Met ar mor o vurmuri gant eur vouez rust ha groz.

Ma daon zorn oa harpet war ma c'harabinen,  
Dindan ma zreid, ar mor braz hag an env uz d'am fen.  
Heusi ran, mignoned, pa deuan da gompren  
Na ve tre 'n den hag ar maro nemed treuz eur planken.

Pa n'em velis ma hunan war bont ma batimant,  
Hep test deuz ma glac'har, nemet ar firmamant,  
Me gommanses hirvoudi gant glac'har hag anken  
Pa deuas da jonj d'in a baroz Trabien.

Ma daoulagad oa troet war zu ar vilajen  
Lec'h a ma da genta guelel ar sklerijen ;  
Ha pa deuis da zonzal em c'herent hag em bro,  
Gant an dour deus ar mor n'em veske ma daëro.

Aboue an devez fatal meus renket kuitat  
Ha dont da gimiadi deuz ma mam ha ma zad,  
Bep noz, pa ve kouskel, em hunre o goëlan  
Hag o sonjal 'n o glac'har, noz ha de a ouelan.

O devez leun a c'hlac'har, o zisisper c'houero,  
O devez deplorabl ha karget a canvio,  
O kitiad ankenius ha glac'harus meurbet,  
Me mo jonj ac'hanout keil a vin war ar bed.

Gant ma c'herent er ger e ma nec'hamant,  
Hi ra ma oll chagrin ha ma brasa tourmant.  
Penez annonsi de c'han breunan d'ar brezel  
Aoun meus d'o lakal gant an nec'h da vervel.

Pa gleyont kement-se a devont kalonad  
Goasoc'h vit an devez a renkis o c'huitat  
Hag hi devo kouraj awalc'h vit gallout supporti  
Hep ma ranno o c'halon gant eur c'helo ken kri.

C'houi, sperejo evruuz, sent ha sentezed,  
Itron-Varia-Drue, ma guir vam biniget  
Reil de nerz ha kouraj en affliksion,  
Reil de o c'hassistans, koufortet o c'halon.

Pelec'h eo et breman, kerent ha mignoned,  
An amzer-ze ken douz hag agreabl meurbet  
Pelec'h ma et breman an amzer eüruz-ze  
A oan en Trabien a no toesk bemde ?

Nijel e pell d'ouzin an amzer ken eürus  
A oan samblez ganec'h, kamaraded joaüs,  
Tremenet e vidon marleze, vit jamez,  
Ar bonheur hag ar joa m'emp tanvel asamblez.

Pa zeñ an nevez-amzer da gargan adarre  
Ar guez a vleuio kaer hag a zelio neve,  
Pa zeñ e war o c'hiz ar genidel er vro,  
Na nimp muin assamblez bep sul d'ar pardonio.

Pa oan en o touez, oan joaüs ha laouen,  
Mes breman on mantret, siouaz ! gant an anken  
Ha ma oll filjadur zo bout 'n eur plas dizro  
O sonjal gant glac'har em c'herent hag em bro.

C'houi a velle breman Yvonik, o mignon,  
O pourmen e hunan war ar rad en Toulon,  
O pourmen e hunan alies tal an od  
Ha daëro e zaoulagad a red var e ziouchod.

Me ve c'hoaz aliez azeet war eur roc'hel,  
Ma daoulagad troët evar zu Breiz-Izel,  
Mantret gant ar glac'har ha beuet em daëro,  
O sonjal em c'herent zo er ger en kanvo.

O douar a Vreiz-Izel, o ma bro biniget,  
Pegoulz a sono an eur ma c'hin c'hoaz d'ho kuelel ?  
Pegoulz a erruo ar momet hag an de  
A zeuio da laket fin d'am c'haptivite ?

O devez leun a zouzier, devez a eürusted !  
Me zo chonzal ennout bep heur ha bep momet ;  
Doue trugarezus, hastet ar momet-se  
Ma c'hin c'hoaz da velet ma bro ha ma c'hontre.

Tre ma oan o teplori war bont va batimant,  
Ar loar a darzas souden ebarz ar firmament ;  
Neuze me a welas uz d'am fen o nijel  
Eur genidel bian evar zu Breiz-Izel.

O ! prest d'in-me, eonic, prest d'in da ziveskel  
Ma nijin en ez plas da bete Breiz-Izel,  
Da gonsoli ma c'herent quent vit kuitat er Frans  
Ha da gas betek eno komzou a esperanz.

Mes allaz ! me n'hallan ket veldout treuzi an aer,  
Me a renk chom aman evel eur prisonnier,  
Evel a oa guechal an Israelitet,  
Pell amzer o c'hortoz an douar prometet.



Marleze feus, eonic, skuizet da zisveskel,  
O nijel dreuz d'ar mor, o tont deuz eur vro bel ;  
Pleg eta da eskel a zo bel pell digor  
Ha repos eur momed en kichen Mab Arvor.

Diskenn eta, eonic, eur momet em c'hichen  
Ma skrivin eur lizer da gas da Drabien ;  
Ha pa m'eus ket veldout ar bonheur dont d'ar ger,  
Te vo da vihana vidon eur messajer.

Kerkent evel ma vi digouet en Breiz-Izel,  
Te vo, eonic bihan, ma messajer fidel ;  
Te rei ma gourc'hemen er ger pa errui,  
Hag a laro d'am zud a c'han d'an Itali.

Grit ma gourc'hemenno d'an tad neuz ma maget,  
Mez allaz ! d'am mam bacour, da c'houez na ri kel,  
Rak boe zon partiet demeurez a Vreiz-Izel,  
Eo et da joulasa deuz ar gloar eternal.

Lar adieu d'am breudeur ha d'am c'hoarezed,  
Goude d'ar beleg koz a nevez ma badeel,  
Na ankoue hini bel demeurez ma mignoned  
Ha lar de a sonjan enno en peb momet.

Lar de, eonic bihan, pedi vidon bep noz  
An Itron Varia, patrenez va farroz,  
Ma teui d'am preservi en kreiz en danjerio  
Ha ma raf d'in ar c'hras da retorn c'hoaz d'am bro.

Mar a teufe d'id o'hoaz, pa vi en Breiz-Izel,  
Raneontri eun devez ma mignonez fidel,  
Lar dei a fo guelet Yvonic, e mignon  
C'hober gard eun nozvez war e lestr en Toulon.

Assur dezi erfad, dre broposiou touchant,  
Meus hopred eviti eur garante ardant ;  
Lar dei a c'ha breman ma c'horf d'an Itali,  
Mes ma c'halon a vo da virviken ganti.

Pa ze an nevez-amzer, te a iel aliez  
Da gana, da fredoni da gichen he frenez ;  
Perag ne allan-me nijel eur vech genoc'h  
Ha mont d'he zaludi betek he zi vel d'oc'h ?

Mes gra ebarz em flas, ha lar dei dre da zon  
Dero'hei jonj da viken demeurez he guir mignon  
Pehini zo, allaz ! pell deuz a Vreiz-Izel,  
En eur lestr war ar mor foetet gant an avel.

Pa vin en Itali, en kreiz ar c'hombajo,  
Kreiz an tan, ar mitrail ha kros ar c'hanonio,  
Neuze eo a teujo ar muian da jonj d'in  
Deuz an amzer eurus zo nijet pell d'ouzin.

Mar teu d'in da vont tiet gant eur boulet traitour  
Hag achui ma deio en eur vro estranjour,  
Neur gouean d'an douar, choaz, kent evit mervel,  
Ma daoulagad a droc evar zu Breiz-Izel.

Ma daoulagad a dro evar zu Breiz-Izel  
Da laret d'am c'herent eun adieu eternal.  
Kerent ha mignoned, c'hui laro gant glac'har :  
« Gras dean digant Doue da repos barz er gloar. »

Kent evit finissa, goulomp digant Doue  
Vit ar mortolod kez bep sort prosperite ;  
Pedomp a vir galon Roue an armeio  
D'em preservi en kreiz kement a danjerio.

Offromp c'hoaz hon veuio da Stareden ar Mor  
Vit an oll soudarded deuz hon bro gaer Arvor ;  
Goulomp gant konfians, pedomp hi gant ferveur  
Da bellat dioute peb goal chans ha goal heur.

Rentomp meuleudigez da arme gaer ar Franz,  
D'hon Prins ken jenerus ha leun deus a vaillans,  
Pere guita o bro vit mont da gombati  
Evit independans oll pobl an Itali.

Kanomp breman 'n eur vouez, Kanomp tout asambles  
Ha vezint enoret ha meulet da james ;  
Kanomp 'ta, Bretoned, deus fonz hon c'halon,  
Gloar hag enor d'hon arme ! Viv Napoleon !

Neb a neus komposet ar zon-ma penn da benn  
Zo ganel ha maget en paros Trabrien,  
A neuz he c'homposet war an ton d'hi c'hana,  
Kanet-hi 'ta, Bretoned, vit n'em divertissâ.

